

Dastumad Pennwern : dornskrid 89

## 71. AR C'HERE PEG

( follennoù 221 - 222 )

Sillaouit kana me ho ped  
 eur chanson newe komposet  
 Liron fal la lure.

A zo gret deur c'here peg  
 A zo bet deg goëch demezet

e lakat ar iod var an tan  
 Setu e varvas hunan.

e c'hober eun allumen viou  
 e varvas eun all setu diou.

e lakat ar iar var e neïz  
 e varvas eun all setu teïr.

e vond dar foar da Landreger  
 varvas eun all setu peder

e vond dar park da skuilla tremp  
 e varvas eun all setu pemp.

e lakad eur podat pis e glec'h  
 e varvas eun all setu quec'h

e lamed ar iar divar he neïz  
 e varvas eun all setu seïz.

e vond dar parc da skuilla teil  
 e varvas eun all setu eïz

e hober eur podat pis a fao  
 e varvas eun all setu nao.

e hober eun allumen beg  
 e varvas eun all setu dek.

A dissul gante en offern bred  
 Me kerc'ho ar sonner var o be  
 Mar deus eun all me reï ive.

vvvvvvvv  
 Jannet Puill, 19 janv. 1851

vvvvvvvv